

KIS-698 – Gl. adapter à, adapté de

(GC da GE – 02 11 00)

Skrivañ a rez : *azasaat diouzh*.

Agentao e klasken kendec'heriañ Gl. *texte adapté des écrits de Grignion de M*. A priori e trofen : Br. *testenn azasaet diouzh skridoù G a M*. Bremañ mar klaskan ouzhpennañ Gl. *et adapté aux enfants*, e rafen gant Br. *azasaet ouzh ar vugale, azasaet d' ar vugale*.

E berr : Gl. *adapté de*, Br. *azasaet diouzh*, Gl. *adapté à*, Br. *azasaet ouzh*. Da soñj ?

(GE da GC – 17 11 00)

Gl. *adapter* zo dezhañ meur a gemeradur ha mard eo *azasaat* e gevatal boas, ez eus doareoù all d'e dreiñ. En holl gemeradurioù e talvez ar verb gallek kement ha "kempenn udb. evit ma tereo ouzh ub. pe udb." : *adapter un robinet à un tuyau, adapter un roman au cinéma, adapter une histoire à un public*. Mar bez arveradus *azasaat* e pep hini eus an teir frazenn-se, e c'haller ober ivez gant verboù all : *degeidañ / kevrikaat / kendlidañ ur c'hog ouzh un duellenn, dezneuziañ ur romant evit ar fñveier, degempenn / dereadekaat un istor ouzh / diouzh / en erdu ur c'hevredig*. E pep hini eus ar frazennoù e talvez ar glokaenn amkan da aroueziañ an danvez da *azasaat*. En droienn a veneged : *texte adapté de* e teu ar glokaenn amkan da aroueziañ disoc'h an *azasaat*, hag aze emañ an diaester ma pukez. Ha ret eo avat heuliañ ar rikladur c'hoarvezet e galleg ? Ha ne ve ket eeunoc'h, ha sklaeroc'h lavarout : *testenn diwar azasaat skridoù X (diouzh ar vugale)* pe : *testenn diwar skridoù X azasaet diouzh ar vugale*.

Techet eur moarvat da veskañ danvez ha disoc'h an ober en arver ar verboù o verkañ un treuzfurmiñ pa na sav diaester ebet evit kompren, seul gent ma chom alies an hevelep anv war an daou : *rostañ kig Økig rostet, dezneuziañ hBr. gued ØBr. gwez dezneuziet diwar hBr. gued, dezneuziañ romant Y evit ar*

fñveier Øfilm dezneuziet diwar romant Y; rebech ebet d'ober keit ma ne vez ket forc'hellegezh. Koulskoude pa sav kudenn evel er skouer a venegez ez eo gwell hepkoriñ ar mesk, ha mont d'an heboell ned eo nepred an diskoulm gwashañ !